



2023

SKRIVAÑ FILMOU

Gant Soazig DANIELLOU

AR PAL

Dont a-benn da ginnig e 5 munut (enrollet e video) en un doare sklaer ur raktres film personel, teulfilm pe film faltazi.

Evit ar c'hentañ a viz Gouere e kaso din pep stajiad e vennozh film displeget en un nebeut linennoù hag e labourimp diwar-se.

AN DOARE DA LABOURAT

Ur strollad 8 pe 10 den a vefe mat. Prantadoù a-stroll a vo, prantadoù dre strollad (teulfilm /faltazi) prantadoù 2 ha 2 ha prantadoù labour hiniennel.

Diouzh ar mintin e vo labouret a-stroll ha daou-ha-daou bemdez war ur poent ispisial : An diazez, ar mennad ren, an tudennoù, ar sekañsoù, ar steuñvenn.

Goufe merenn e vo skignet ur film e brezhoneg kinniget ma 'z eus tu gant ur sevenour(ez) hag eskemmet warnañ. Tu vefe da skouer pediñ Emmanuel Roy, Guilvic le Cam ha Mai Lincoln o do sevenet pep hini anezho ur film berr e 2023

Labour hiniennel (pe daou-ha-daou) a vo goude war tem an devezh, pep hini o labourat war e raktres film gant sikour ar stummerez.

Kalanna@orange.fr